
EXEMPL

*Ha punition nevez arreet gant eur pec'her mechant peini
en devoa entreprenet hada canap ha pis deis ar Iaou
Basq, hep caout aon rac punition Doue, arruet en Meaux,
en Brie, troët a hallec en brezonec.*

Var don ar plac'h yaouanc a Escopti Roason.

Chelaouet, Christenien, hac e cleffet canan
Un exempl a nevez arreet er bloas man,
A so gred var ar sujet demeus er pec'her ingrat
A vevez er bed-man en eur stad miserabl.

A dost da Meaux en Brie e chomez ar mechant
Pehini oa punisset gant Doue en un instant :
An deves diaroc ar Iaou Basq en devoa gret labourat
Eur parc prest clos ha da enna pis ha canap.

An den-man n'en devoa na fez na religion,
Ma lavaras dez dut an nos fez an den direson
Da lequi tudin em sac'h hat canap a pis Rom
Evit m'ho hadin varhoas pa medi ar saison.

He vrec pa er c'hlevas a deus bet respontet
Evit varhoas emezi ne veo quet labouret ;
Varhoas eman ar Iaou Basq goel an Asansion,
Men fel var da gomsou out un den direson.

Da ziveur deus ar mintin he savas an den-man
Ma quemas he sac'h evit mont d'ha hada
Hac he vrec en eur grial he deus dezan lavaret :
Men fel ar fat, malheurus, ezout un den collet.

Respont a ra ar mechant d'he vrec ha dez vugalez
Ho tont d'ha vlasfemi an ano sacr a Zoue :
Men a renq mont d'ho hada pa zeo hueden songet
Pa glefen corf hac enez mont gant an drouc speret.

Sortial a ra deus he dy carguet demeus a goler
Hac an deus rancontret en he hent eur boulonger
Peini iez da gaz bara deur pardon voa er c'hanton
Hac en lavaret dezan : mintin out, va mignon.

Querquent ar boulonger en deus outan goulennet :
Da belec'h, va mignon, heus esper da vonet ?
Men a ia, emezan, da hada canap a pis Rom
Abars ma vezo dez pa medi ar saison.

Neuze ar boulonger dezan a respontas :
Divoallet, va mignon, herio eus eur goel bras :
Mar det enep ar lesen Doue ho punisso
Da vont gant an diaoulou da soufr cals a boanniou.

Buhan ar malheurus en deus dezan respontet
Dre gals a veprisanç e voa Doue cousquet
Hac ar sent hac elez so ive guer couls hac en ;
Men ia bepret dam labour hep ober fors anez.

Querquent ar boulonger en deveus bet respontet :
Hirio ema ar Iaou Basq labourat so pec'het.
Mar am c'hredet , va mignon , dar guer he tistrofet ;
Doue , ar sent ac an elez ne vent jamais cousquet.

An den malheurus-man hoassoch evit diagent
Hen eur blasfemy Doue a ia bepret gant he hent.
Pa voa en parc arruet hac e sac'h gantan poset ,
Doue , ar sent ac an elez a so bet difonet.

Mes Doue , christenien , so outan en eur venget
So deut d'he bunissa en he grim hac he pec'het
Abalamour d'har c'hrimou hac ivez d'ar lachete
En deveus bet commettet enep he vajeste.

Doue evit he bunissa deus e voal proposiou
Ha demeus an dismegans en devoa evit ar goeliou
Hen deveus bet permetet ma zes bet chomet cousquet
En eur stad pitoyabl : horrol voa he velet.

Quement a dremenez gantan voa oll estonet
O velet an den-man penos voa diformet
O velet he zaoulagad dislontred en e ben
Henvel mat deus un diaoul sortiet deus an ifern.

Drez he gousq he rez criadennou a re hesusa ,
Cals a dut ons he glevet a deuez da sponta ,
Var het ugent pas dezan ne grede den tostot
O velet ar stad effroyabl deus ar pec'her ingrat.

Ar hobl oll estonet o velet quemen-sez
A gassas ar c'helou de vreg a d'e vugalez
Penos voa ar malheurus en he barq chomet cousquet
En eur stad effroyabl , estonnus da velet.

He vrec pez deus clevet so e c'halon mantret
Hac e vugale baour a voa oll glac'haret ,
O commancet da voela da bidy an Otrou Doue
Mar bigez he volonteze da gahout outant truez.

Dar parc he partias o sonjal he zifuny ,
Mes inutilamant voa quement-se dezy ,
Rac an den-man , christenien , a voa cousquet quer calet
Evit crial outan ne rez seblant ebet.

He vrec paour estlamet o velet quemen-sez
Ha ieas neuze souden da gonta dar c'hurez :
Va friet , emezy , so en eur stad miserabl rentet ;
Deut hon d'ho suplia da zonet d'e velet.

Ar c'hurez estonet pa glevas quemen-sez
A ieas buhan d'har parc da out ar virionez ,
Hac envel mer guelas o lavaret dan dud neuze :
Homan so eur bunition deut deus a zorn Doue.

Ar c'hures epouvantet ha mantret he galon
A deuas d'har guener vintin gant he brocession :
Gantan nombr bras a dud a voa ous he asista
Deut da houlen deus Doue pardon evit an den-man.

Ho Doue , christenien , so just ha puissant
Hac evit discoez exempl d'har bec'herien vechant
A bermettas bepret ma chome an den-man cousquet
Ha ma voez deus he barq d'e vele transportet.

He vrec paour glac'haret o velet quemet-man ,
Nos ha de , christenien , ne ra nemert guelan
Ha supplia Doue da gaouet outi true
Da zilivra e friet deus he gaptivite.

D'har plaçou santela voa ganti partout goestlet
Ha cals a offerennou a rez da lavaret
Ac a hent-all a rez cals deus a chariteou
Evit apesi coler Jusus-Christ hon otrou.

Hac eur certen derves gant Doue inspiret
E zeas da visita ar Verc'hes-biniguët
Ma vije he madelez procuri dirac he mab
Da zilivra he friet voa en eur stad miserabl.

Hent distro a c'hanes , goude ober he oreson ,
He deveus rancontret en hent un itron
Pehini vel m'e guelas e deus dezi lavaret :
Men vel deus ho feçond e zoc'h sur glac'haret.

Ar vrec-man desolet ha carguet a glac'har
A gontas ar virione neuse dezi ractal :
Ma friet, emezi , so en eur stad pitoyabl ;
Ma na deu Doue d'er sicour e varvo en goal stad.

An itron , pe glevas , dezi a respontas :
Me so mam da Zoue a meus bet dec'h ar c'hrac
Dre ma zoc'h fidel din a ma zoc'h deut dam pidi
E zon deut d'o consoly ebars en ho ennui.

Mes certen ho priet so un den obstinet
Hac a so caledet ebars en e bec'het
Rac dre e voalgomsou hac e leoudouët
En deus tennet var nezan coler Salver ar bet.

Het dar guer , emezy , consolet o bugalez :
Er spaç a huec'h sizun e chomo er stad-se.
Pa vo deut an amser-se neuse he difuno
Da ziveur deus ar mintin , da anaout e grimo.

Neuse ar Ver'hes sacr diouty a siparisas
A laquas ar vrec-man en eur joaustet vras
Hac hy donet dar guer da gonta d'e bugale :
Ho tad a vo delivret dre ar c'hras a Zoue.

Da ben ar huec'h sizun e ze bet difunet
Hac en commanç da grial evel en den follet ,
Hac en o lavaret d'e vrec a d'e vugale :
Malheur dar pec'herien mar offançont Doue.

Ouspen caut mill bloas so men a so tourmantet
En creis punç an ifern evel en den daonet.
Nen deus den evit discleria na ne veso birfiquen
Ar poanniou horrubl ameus souffret e creis en ifern.

Quement sort supplicou a voichet da inventi
A voa tout preparet evit ma zourmanti
Abalamour dar grimou hac ives dar leoudouet
Perez am boa commettet enep Salver ar bet.

Mantri a ra ma c'halon , crena ma oll memprou
Pa deuan da sonjal peguer bras ar poaniou
Pere ameus souffret hep caout ouzin nep damant
Gant an oll diaoulou en creis an tan ardent.

Gant an oll amprefanet men so bet tourmantet
Ar c'hic divar ma esquern ho deus bet dispennet
Hac ives ma daoulagat tennet demeus ma fen :
Malheur dar bec'herien ma na reont binigen.

He vrec hac e vugale estlamet oc'h e glevet
O compren er poaniou hen devoa anduret
Hac a lavaras dezan : mar carjec'h beza santet
Ne vijoc'h quet bet er his-se tourmantet.

Er spaç a huec'h sizun e zoc'h bet er stad-se
Quement a deuez da guelet gant horrol a grene
Pa gomprenent er stad en pehini e voac'h rentet
Gant an otrou Doue palamour d'o pec'het.

Graçou bras a meus bet digant Doue da zonet er stad-ma
Mes queit a ma vevin men vo fidel dezan ,
Rac ma vije bet venjensus em andret
E voan evit biquen ebars en ifern chomet.

Heman so en exempl ac a so epouvant
Ha gle dont da droubla an oll antieramant
Mar deuont da gompren er poaniou so en ifern
Hac a so preparet evit ar pec'herien.

Cetu aman , christenien , eur misillour patant
Hac a gle tenerat calon an dud mechant
Perez a deu bemde da vlasfemi Doue
Hac he vam ar Verc'hes , rouanez an æle.

Dre an exempl a guememan a teuan d'o exorty
Da vesa bepret devot dar Verc'hes Vary :
Quemerit y evit mam ac evit advocades
Y bedo he mab Jesus da gaout ousoc'h truez.

Bevomp santello'h en amser da zonet
Evit n'on deveus gret en amser dremenet :
Pedomp ar Verc'hes sac'r hac e mab binniguet
Da receo hon enez ebars er joaustet.

FIN.